

Miz Du 1904.

Rummen 9. — Bloavez. I

AR VRO

KELAOUENGELC'H
MIZIEK

KROUET EVIT BEZA

EUN ÈRE
ETRE

AR VRETONED

*Sebu an heol war o sevel
Kag o tiriell war Dreiz-Izol...
Taldir*



Dindan Renadur :

An Aotrou Fanch JAFFRENNOU "Taldir"

EUZ A VOULLEREZ AR GWAZIOU HA JAFFRENNOU E KERAEZ (Penn ar Bed)

En gwerz en holl Stalioù Lec'hioù gwir vreton

*L. J. Gouarnier
1904*

Paëroniez "Ar Vro" :

An Aotrou 'N Eskop DUBOURG — An Aotrou Markiz ha Kannad AN ESTOURBEILLON
An Aotrou Kannad LAMY — An Aotrou Kannad HEMON
An Aotrou Markiz FREDERIK A GEROUARTZ — An Aotrou Drouiz IAN AR FUSTEK, " AB GWILLERM "
An Itron Enorus MOSHER — An Itron Enorus ANNA A GERVENOAEL

KOUMANANCHOU :

Breiz ha Bro-C'hall : 16 real | *Breiz-Veur ha lec'hiou-all : 20 real*
PRIZ EUR RUMMEN : 7 GWENNEK

KRENNAD :
Jannedik
TALDIR
Stad ar Brezonek
EVNIK ARVOR
Kanerion Guened
JOB AN DROUZ-VOR
Konchen ha Kentel
F. AR MAY
Peden eur Breizad
AN ARC'HANTER
Damb arnehê!
LOEIZ HERRIEU

AR VRO

Penn-Rener :

FANCH JAFFRENOU " TALDIR "

« Kaz an den ha na gar ar Vro a vag anezan »
Tennet deuz Aliou mad Sant KADO
(Myvirian Archeology, lev.: III., d. 40, rimel, 3.)

KRENNAD :
Ma Garrek
AR YEODET-BO CHER
klemenvan
Guenc'hlan
MEL-OC'H-DIR
Laouik
PRONOST
An dramm kenta
ROC'HLAN
Leorlennadur
X...

Kenskrivadek Kontadennoù Nedelek

Ar gelaouen sadorniek Ar Bobl he deuz savet en e rummen 7 (5 a viz du) eur Genskrivadek a Gontadennoù Nedelek en brezonek.

Prijou a vo roet d'ar re wella. Sed ama eun nebeud anezo :

Priz kenta: Eur vedalen arm, hag ouspenn eur goumanant bloaz d'Ar Vro. Ar gwella kontaden a vezo moulet er rummen Nedelek euz Ar Bobl.

Eil priz: Eur c'horn-butun bruk gwirion en eur c'hloier kaër, roet gant Olier Sagory « Barr-Acel » hag eur goumanant bloaz d'Ar Vro.

Trede priz: Eur vrochen goant, kinniget gant Breuriez studieren Roazon, hag eur goumanant bloaz d'Ar Vro.

Pevare priz: Kant Karten-Bost euz a wiskaman-chou Breiz-Izel, roet gant Emil Hamonic hag eur goumanant bloaz d'Ar Vro.

Pemped priz: Eul levr Barzaz Taldir, hag eur c'hant kartennou-bizit e brezonek.

Eur bern prijou all (teoriou, spillennoù etc.) a vezo roet c'hoaz m'r be kalz a dud o kenskriva.

Kloz a vezo ar c'henskriv an dek a viz Kerdu.

Kas an dornskridou da Daldir, pehini o diskuzo d'ar Varnerien.

JANEDIK

Pez-C'hoari evid ar Merc'hed iaouank

(Kendalc'h)

EIL ARVEST

RANN I

JANEDIK, (o skuba hag o frot)

JANEDIK

Allo, Janedik paour, skub'ta, frot'ta ! Na vo biken re skler an traou. An Itron a gavo da lâret ennê c'hoaz. Skub'ta, frot'ta, netê'ta, an annez eo red d'ê lufra petra-

mant e vo kroz... *(dihan a ra da skuba)*. Ia, sethu me ama unnek miz zo bremaik. Me lâr d'ac'h am meuz bet digare da gaout hir an amzer ? Repoz a-bed, peuc'h a-bed, sul a-bed, ha dalc'hmad insultou, rebechou, kaër am meuz ober deuz ma gwella. Ken 'on deut da vea klanv ha drouglivet... Sellet deuz ma min ha lâret ar wirionez d'in... Mar-d eo Jannedik vrago on-me ken, me c'houll bea... *(Trouz ar-meaz)*.

JANEDIK

Arru eo an Itron. Skub'ta ! Frot'ta ?

RANN II

JANEDIK, AN ITRON

AN ITRON

Ahanta dimezel ? N'ho peuz ket an ear da staga kalz war al labour ar mintin-ma ?

JANEDIK

Ho tigare, Itron..r

AN ITRON

Han ? Petra ? Respont a ret ? Na blich ket d'in ar mojou-ze. Lest, ahanon da gomz, me ho ped. N'eo ket me ar vestrez ?... Sê ! Ar c'hantoueller 'on o paouez kaout anean war daol ar gegin ? Eno 'ma plas ar c'hantoueller ?

JANEDIK

Oan o vond da lakaat anean en e blas, Itron, mez gourc'hemenet ho poa d'in dont da sira.

AN ITRON

Na gollfet biken ar voaz fall da respont d'in ? Na c'houllan ket ze a-grenn ! *(Mond a ra e kuit sumet)*.

RANN III

JANEDIK, (he unan)

JANEDIK

Ia, ma zud paour, c'houi lâr, mez n'eo ket brao bea dindan ar seurt kêkennoù. Hag holl emaint e giz-ze, an itronezed ama, herve'welan... Evidon'vad, tremenn skuiz on ganthi... Augustina a rea d'in promesaou kaër, mez brema e welan oa gwiroc'h kaoz ma mam ! Allaz !

Allaz ! Pelec'h oc'h, ma mam ha ma c'hoar ? Ouspenn kant leo diouin ! O ma bro Breiz-Izel, tec'het on disuac'h, siwaz d'in ?... Kant skoed ar bla eo ma c'homanant ama gwir e, mez ar c'hant skoed-ze a zeu da zaou c'hant liur berr ha berr, peguir an traou torret a ve war ma c'hont da baäa ha da ramplasi. Ha c'houi sonj me oa bet kustumet da ziblas plajou ha traou ken fin vel ar re dre ama ?... O ma Jezus, pebez buez ! An aotrou c'hoaz, hennez na c'hourdrouz ket kalz, mez an itron... an itron ! Kaout a ra d'ar Barizianez-ze e c'hall ober gant eur Vretonez evel ma karo. Barz en Breiz-Izel, an disterra matez a zo gwelloc'h deut gant e mestrou evid na c'homp gant ar vourc'hiziën lor'hus-ma ! Hag abalamour ec'h omp Breizadezed, e kav d'e e c'haller lakaat ahanomp d'ober an holl labouriou, zoken ar micheriu divaloa ! Mar plich d'e kaout Bretonnez en ho zervich, n'eo ket dre ma istimont ane, mez abalamour ma c'hellont ordrenn d'emp vel ma keront, ni a ve kontant dalc'hamad... Ha peseurt boued am meuz-me ama ? Ar restachou, ha netra ken... Ha ma gwele, o ma Salver ? Eur c'hoz vate-lassen e-barz eun toull kampr bihan, er bemped estach... Pa ve ien, e skorn eno, pa ve tom, e poac'h ! Dija 'on krog da basaat, me ken iac'h araok....

(Mouez an Itron)

Janedik ?..

JANEDIK

Itron !

(Mouez an Itron)

Skubet dindan ar gwele.

JANEDIK

Ober ran, Itron.

(Mouez an Itron)

Didumennet ar bandulen.

JANEDIK

Ober ran, Itron.

(Mouez an Itron)

Ha diwallet mad da feneantal, rag me zo vond da bourmenn. Prestik en em gavin da weled ho labour.

(Mond a ra da bourmenn).

JANEDIK

Feneantal ? Me gav d'in an Itron eo a feneant, deuz ar beure beteg an noz. Me ra an holl labour ama. An Itron na brizfe ket stoka bek he biz deuz tra 'bed. Allo, peb tra prest d'ei, ha dustu !... Eur vuez evel-henn a zo eun ifern... D'ar gear e renkan distrei, na zervich ket. Gret am meuz ispirianz deuz Pariz ! Chom hep kaout sul nag ofern, na mann a-bed ?... Augustina a bromete d'in pourmenadennou hanter-amzer, ia... deuz a-drenv ! Trist eo ma flaneden, pa sonjan petra meuz kollet o tond ama... Ha gwaso zo, santout a ran na zalein ket d'en em gaout potiner, mar choman pelloc'h ama. Mervel pell deuz ar gear... o ma Doue biniget, na bernetet ket en em gavfe ze ganin... (Gouela 'ra.)

RANN IV

(Ar c'hloc'h-dor a zon.)

Janedik a ia da zigerri, hag Augustina, distruj ha livet fall, a zeu en ti.)

JANEDIK, AUGUSTINA

JANEDIK

Te ama, Augustina ?

AUGUSTINA

Allaz !

JANEDIK

Na petra out deut da vea ? Feson glanv ec'heuz. Unnek miz zo n'am moa ket adgwelet ahanout... aboue ma c'herrujomp asamblez en gar Monparnasse...

AUGUSTINA

Janedik !. Pardon d'in bea digaset ahanout ama !

JANEDIK

Ia, pardonet out, Augustina. Mez kont d'in da zoare 'ta ?

AUGUSTINA

Mar teurveez chilaou a hanon... Ma flaneden, ma zonkadur, a zo bed kri meurbed. Pa 'n em gaviz deuz ar gear da gaout ma flas gwechall, e oa respontet d'in e oa bet roet d'unan all, goude ma oa prometet mad d'in. Gwel petra eo komz ar c'hoz Gallaoued-ze ! Pelec'h mond neuze ? Sethu me da verka ma hano en eur "Bureau de Placement," mez kaer moa gortoz, plas keginerez a-bed na gaven, hag en eur miz, e moa debret kazi ma holl esperniu. Bountet gant an naon hag an dienez, me vond neuze da redek ruiou Pariz, siwaz d'in. Ma karjen bea distroet neuze d'ar gear ! Em bro em bije kavet eun tam labour bennag... Me goueaz en eur gompagnunez fall, pardon, o ma Doue, hag eno eo e tasta miz ma gwaleur. Eur gwall glenved am meuz paket, hag ec'h on antreet neuze en Hospital, le c'h on bet digemeret dre druez... Eur miz on bet eno, ha n'on ket iac'h tre c'hoaz....

JANEDIK

Paour keaz Augustina ! Da blaneden a zo trist, gwir e, mez ma hini a zo ive. Me a zo ama en eun ifern, en eun ti lec'h n'am meuz repos na peuc'h, lojet fall, pemp eur gousk hepken, kozeet diouin vel deuz eur c'hi !

AUGUSTINA

Janedik kez... ha me eo a zo penn-kaoz d'ez gwaleur, allaz.

JANEDIK

Augustina, ma gemer ket nec'h gant ze. Ar pezh a zo great, a zo great. Mez evidon, na chomin ken pelloc'h en toull-Pariz-ma. Me fell d'in mond d'ar gear war ma c'hiz, ha mar ro Doue ar c'hras d'in d'erruout iac'h adarre en Karnot, me a ouest ober teir gwech an dro da chapel Sant Weltaz binniget, war ma daoulin noaz.

AUGUSTINA

Chanz ec'heuz, Janedik. Me garche galloud lavaret kemend-all, ha retorn duhont... Pariz brein an neuz kollet d'in ma enor asamblez gant ma iec'hed.

JANEDIK

Perag 'ta na retornez ket d'ar gear ?

AUGUSTINA

Mez n'am meuz ket eul liard !

JANEDIK

O mar n'euz 'med ze ! Me 'meuz war dro daou c'hant liur goneet, hag eun hanter ané e prestin d'id gant plijadur. Te a rento ané d'in pa c'halli.

AUGUSTINA

Mersi d'id, trugarez d'id, Janedik ! Pebez kalon vad out ! O pegen eürus ec'h amp da veva darre barz hon Bro ! Me a labourro eno evel ma ren kent, ha mar na zastuman ket a aour, diana me mo an eurvad hag an evurusted, asamblez gant ma c'hamaradezed gwechall.

JANEDIK

Ia, Augustina, an evurusted en-mesk tud hon bro, henvel diouimp, a gomz eveldomp, a zonz eveldomp, eno ma ar penn-kenta. An neb 'neuz gwelet ar Barizia-zianed deuz a cost, a oar pegen fall tud int, ha pegen braz eo o dispriz levid ar Vretoned... Me a rai ma c'honje d'am mestrez benn arc'hoaz hag e tistrofomp d'ar gear asamblez. Na pegemend a brez a zo warhanon da weled a-nevez touriou koant ma bro, he lanneier braz, he frajou glaz hag he zud ken karantezus !

Na pegemend a hast am meuz da glevout adarre koazeal brezonek dre-holl !

AUGUSTINA

Ha me 'ta, Janedik ! Brema e komprenan pegen koupabl on bet dirag an Aotrou Doue p'am meuz great dismeganz deuz langach ma mam.

JANEDIK

Sell, Augustina, penegwir ec'h amp adarre prest da veza eürus, ma kerez ekanimeun tamson vrezonek ec'h euz disket zur koulz ha me, pa oaz iaouank. Deut e oa ganin ama, barz ma godel... Kanomp anei asamblez, ha pedomp ar Werc'hez Vari da rei ar c'hras d'emp da viret diagent, stag ouz hon c'halon, an diou garante omp bet ken prest da goll ané : Karante Doue, ha karante hon Bro.

Kana reont beh eil pöz ar ganouen-ma : (1)

1. O ma bro gaer a Vreiz-Izel, ma c'harante wirion.
Davedout pa daolan eur zell, trid em c'hreiz ma c'halon.
2. Sed dubont ar mor glaz-glizin, warnan goueliou gwen-
[kan,
Ouz an öd ar wagen lizhin a darz en eur ganan.
3. Vid gwir out-te perlezen Vreiz, ma mam-bro Landreger,
Gant traouniennou glaz en ez leiz ha trevajoù zeder.
4. Pelloc'h eman bro Leoniz, bro an touriou uhel,
Savet war gant ha kant iliz tro da Gastell zantel.
5. En Kerne, na brao eo bevan en ear skanv ar mene,
Pep tra zebtant seder ha glan pa vertostoc'h d'an ne.
6. Ha dreist-holl pezh ra d'in tridal eo eo kavout tro var dro
Roudou tud an amzer gwechall o deuz zavet ma bro.
7. War ho roudou, gwir Vretoned ouia difenn ho pro,
Ni fell d'emp mond ha mar be red skuilla hon gwa
[d'hon zro.
8. Sent hag ho peuz savet er gloar evel eur Vreiz neve
Grit ma skeudo Breiz an douar hoc'h hini zo en ne !

(Ar ridoch a ziskenn.)

TALDIR.

(1) Savet gant Abhervé.

— K. B. B. —

Stad ar Brezonek

Er bloaz 1903-1904

Sethu ama ar skrid a zo bet leaset e-pad Goueliou Kendalc'h Gourin gant an Ao Fanch Caurel, "Evnik Arvor", mestr-skol en Sant-Nikolaz-ar-Pellem, (Kerne-Uhel).

An enor en deuz great d'Ar Vro da fiziout warni embann e labour ar genta.

Na n'eo ket bet ken heskinet hon Bro 'vit pezh a zell e iez evel an daou vloaz tremenet. Deut zo bet bete d'emp, keulskoude, kelou penaoz eun neu-beud beleien breton o deuz kollet o fae abalamour d'o iez. Ac'hendall eo bet sioul an treo, hag a zo bet labourer stard ; helibini-genta zo bet tre ar varzed, ar skrivanerien all, hag ar c'hoarierien zoken.

Oc'h arruout er gear deuz Kendalc'h Lesneven, meur a hini ac'hanomp a gavaz eul levrik en ti, ouz hen gortoz. *Mouez an Aochou* a oa. Gret eo gand Glanmor, unan euz gwella skrivanerien Bro Leon. Kavet a reer e leor an Ao. J. Guilandre gwerziou dispar 'vit pezh a zell treo ar mor. War an dro gand leor Glanmor, e teue er meaz ouz ar wask *Ma Beaj Jérusalem*, gand an Ao. Le Clerc. Meulodi leor Kloarek ar Vern a zo bet gret gand daou Vreizad deuz an dibab : an Ao. N. Eskop Dubourg hag an Ao. Kerjean, person Sant-Martin Montroulez. Unan euz ar gwella, pe ar c'hentan, zoken, eo *Ma Beaj Jerusalem*, euz hon leoriou brezonek en komz plen. Daou leor all, en komz plen ive, a zo deut d'emp c'hoaz er bloaz tremenet : *Skoueriou Kristen*, gand eur belek, eur skrivanier euz ar gwella, hag a guz e hano dindan an hini a "Visioner breizad", hag *An Avel*, gand an Ao. abad Caër. Al labourerien diwar ar meaz, zoken, o deuz pleet gand ar brezonek, ha Juluan Godest, o kerzat war roudou ar barz Gwenlan, hep bea bet eun de er skolan euz roet d'emp e *Gwerziou pobluz*, dastumet ha kempennet gand ar barz Taldir, ha moulet dre vadelez an Ao. Botrel. Patred ar Jabadao o deuz zavet eur *Roll giriou*, hag Erwan Sébillot, *Roll hanoiou badiziant*. An Ao. Gall, person ar Folgoat, an euz roet d'emp eur *Lerr oferen latin ha brezonek*.

Cognomerus ha Santez Trifina, hag eun dibab peziou brezonek deuz c'hoariva hon zud koz, a zo bet hadvoullet gand an Ao. Anatol Ar Braz. *Almanak K. B. B.*, ennan meur a skrid brao en brezonek, an euz kemeret plas touez an almanagou. *Eil farsal*, a zo eun tammik leor fentus gret gand *Er Barh labourer*. Neuze hon euz bet pevar leor deuz ar gwella evit studia hon iez. *Geriou keumraeg ha brezonek*, gand an Ao. Vallée. *Tried rummen Etymologie bretonne ; Dictionnaire Breton-Français avec supplément du dialecte de Vannes*, gand ar skrivanier kalonek ha gwiziek eo an Ao. Ernault

hag eur *Vocabulaire Breton-Français du dialecte de Vannes*, gand an Aotrone Goff ha Guillevic.

Prestik e teuo er meaz den war wask eur *Grammaire raisonnée de la langue bretonne*, gand an Ao. Ernault c'hoaz; *Dre an Delen hag ar C'horn-boud*, gand ar barz Alc'houeder-Treger, hag eur leorik brao, *Gwin Koata-skorn*, gand Ch. Gwennou. *Kroaz ar Vretoned*, renet gant Abherve, a zo bet, bep-son, e c'houec'h mil tiegez, o komz dez Breiz, dez he Barzed, dez he Istor ha dez kement a zell outhi. Hon e'halon a Vreizad an euz tridet en hon c'hreiz alliez a wech pad ar bloaz, o lenn pennadou ken kalonek, ken breton an Ao. Berthou, en *Kroaz Montroulez. Courrier du Finistère* a ro bepred d'e lennerien skridou en iez koant an Arvor; piou na neuz ket lennet e varvaillou ken koant, ken dudiu ha ken fentuz war eur dro? Beteg e Kear-benn Bro C'hall a zo diwanet eur gazeten vit eoni iez Breiz-Izel: *Bretoned Paris*. En Keraez, Taldir hag Ar Goaziou ho-deuz savet eur voullerez, elec'h ma ve great brema *Ar Vro*, hag eur c'hazeten neve, *Ar Bobl*, pehini a dap da bevar c'horn hon Bro. Euz Paris c'hoaz a zo bet deut d'emp, er goanv divezan, eur gelaouen dez ar c'hoantan, en brezonek penn da benn. Gand pegement a brez ar varzed a zigemere *Spered ar Vro* pa arrue war douarou Breiz! An Ao. Tanguy Malmanche an euz gwelet e gelaouen o vervel, siwaz! Re neubeud a Vretoned o doa chilaouet e c'halvaden, hag ive — real eo hen laret — an oll sperejou, en Breiz, na oant ket prest awalc'h c'hoaz! Planeden fall *Spered ar Vro* a c'hlaçharaz kalon ar barz Taldir, hag hon c'henvroad an-neuz zavet ar gelaouengelc'h *Ar Vro*, ken brudet dija: *Kloc'hdi Breiz*, en Oriant, a zalc'h d'ar brezonek, ha dre Vreiz a-bez, e tiwan дума ha duhont, gazetennou brezonek, beteg *Stereden Boulcriak*, du-hont en Kerne-Uhel; buhe hir d'eze, enor d'o skrivannerien!

Petra larin diwarbenn ar skoliou! Re Gwengamp, Redon, Montroulez, a ra labour vad tre: Hini St-Charlez, en St-Briek, a zo paouezet, siwaz, aboue ec'h eo bet forbannet he renerien goz. Skol brezonek Brest an euz kollet an hini an evoa he zavet ha sturiet ken mad. Gouelomp, Breiziz, an Ao. Koronel Bourgeois; dalc'homp an envor dez ar Breizad kalonek-ze!

Kentskrivadegou a beb sort o dez roët an tu da galz a Vretoned da gemer o fluen en enor d'o iez; eur me-nek a zo dleet dreist-oll d'an *Association artistique et littéraire de Bretagne*, renet gand an Ao. Loth; d'ar *Jabadao* ha da renerien *Pardon Montfort l'Amaury*; Brizeuk, en *Primet ha Nola*, o komz dez barzed e amzer, a lavar penaoz e ledent dre ar Vro o gwerziou war baperou distag. Eur stum gwell vad eo hennez, da rei lennadur d'ar bobl! Pevar dez hon barzed: Taldir, Abherve, Ar Barz labourer hag Erwan Sébillot, o dez gret kemend all evit ar bloaz. Skignet o dez dre Vreiz gwerziou dez ar brava, gand toniou dispar. Aliez war ar meaz da zerr-noz, e klevi ar micherour pe ar c'houer, o vouskana ané.

Niverus oa dija, warlene, strolladou ar botred iaouank, pere a c'hoarie en brezonek; bet hon euz an curvad da weled ané en Lesneven. War o roudou, re-all o dez

kerzet c'hoaz ar bloaz-man. Saludomp eta *Potred Lok-Maria*, o tremen gand o baniel war behini welet skrivet en lizerennou aour: « Douc ha Breiz bepred »! Saludomp *Potred St Arzel*, e Gwitalmeze, *Potred St Vigner*, e Pluvigner; saludomp dreist-oll studierien iaouank, pere e kreiz Paris, o dez c'hoariet ken mad *Ar Mab prodig*. Enor ha kalon d'ezo!

Stad ar brezonek, 'vel a welet, kenvroiz ker. a ia bemde war wellaat. C'hoaz ec'h eio, er bloaziou da zond, rag ni gerzo war roudou hon zud koz; evelse ni a gano dalc'hmad:

Ni zo bepred Bretoned,
Bretoned, tud kaled!

Gand Abalor, ha Taldir dreist-holl, ar brezonek a zo bet enoret, e kement gouel broaduz bet lidet e Breiz: en Oriant, en goueliou Brizeuk, en Landreger, en Beg-ar-Raz. Staget eo zoken, war mogerioù tier gar Breiz!

Hon brezonek a zo studiet en skoliou braz ar broiou estren: en Allemagn, Bro-Saoz hag en Amerik. Meulodi d'hon c'henvroad Moris An Dault, pehini an euz savet eul leordi breton, ha gwerzet kalz a leorioù d'ar skoliou-ze. Keuz am euz o laret penaoz Breiziz a zo bet dibled, ar peurvuian, euz labour ar barz *Leortenner*; mar karomp Breiz, eo eun dlead d'emp rei dorn d'an.

Ar brezonek a zo bet enoret en tu-all d'ar mor, dreist-holl en Bro-Geumri. Eno eo studiet ha karet. Eno, dec'h c'hoaz, 10.000 den o dez straket an daouarn d'an, p'eo bet komzet en kendalc'h Kernarvon, gand hon Rener, an Ao. de l'Estourbeillon.

Rezon en noa Luzel o kana:

Piou lavar eo maro en Breiz
Spered ar re goz hag ar feiz,
Hag e kollomp hon iez bemdeiz?
Keit ma vo bruk en Breiz-Izel
Hag en aod ar mor glaz, rec'hel,
Hon iez koz na hell ket mervel.
Keit vo gerrek en aod ar mor
Kano ar barz war dreuz e zor,
Bepred en iez koz an Arvor!

EVNIK ARVOR.

Kanerion Guened

Ur blé bennag zou a houde em es lennet, en ur livr mollet edan en hanù kaer a « Vleuniou Breiz-Izel », penaus er sonnerion a vro Guened e vihanne berped, ha kent pel eu boehieu ne vehe ket bet mui kleuet ar en doar. En hani e gonze else, hum farie un tamig, kredein e hran, a p' en de guir e me hornad, ha memb, e me her, hum gav deu zen iouank a hourien er hannerion poblus. Unan anehe a arriu er ble-men ag er chervij, hag en aral en des hueh pe seh vle ar nuigent. Ou daou, brudet mat en hur harter hag en hur parrez afeh, e zeli, de me chonj, bout laket dirak

hou teulagad. Er iaouankan e zou hanuet « Stevan » hag en al en des el leshanu « Er Bohek »... Ou deu e mant bet skoleit ar barlen ou mammeu : hanni anehe ne hoer na skriu na len, just e hel-lant lakat ou hanu. En arben a gement se hui e chomou souehet, a pe larein d'oh en niver bras a sonnenne e houliant.

Er Bohek ean e unan, e zou kapabl de has deu ze ha diu noz e laret er hannenneu kizellet en e ben. Chetu un den a vimoer vat hag a spered anpert !

Er paotr iaouank men hoah, epad e zervij, n'en des ket bet eun a gannein lies a hueh sonnennen brehoneg dirak en ofiserion hag er soudarded. Un anderu noz, en ur gazern etal Pariz, ean en des mennet krapout ar en teatr avoit son dirak e gapiten. Hanen, koutantet ha rejoisset mat dre don brav er gannen (rak ne gomprenet ket nehon er girieu) e hras d'Er Bohek ur peh a eih rel.

Stevan, ean, e lak er leuine e kalon en dud er festeu hag er filajeu.

Lennerion er Vro, taulet ur sel ar en huerzen men pere e gemeran a mesk er re em esbet get, deu, gannour a me her. Marse e mant deja hanauet ! mes... vern ket.

Un tarh kalon

- Er hannour.* — E 'ta er boulom ken dihoen ag en overen bred ;
Ean e gav e verh ar e hent hag hi forh glaharet.
- Er boulom.* — « En hani hou kuelei bremen larei hou pou ouilet. »
- Er verh.* — « Penaus n'em behe ket. me zad. kalz a zareu skuillet :
— En hani garen er guellan, hui hues ean goalgaset.
— Kontet d'ein me. me zadig peur, pear hant skoed
[en argand,
— Ha ma cherran me men dillad eid monet der hovant. »
- Er boulom.* — « Naren, naren, me merhig keh, d'er hovant deet ket
— Rak n'em esket merh meit d'oh, naren kroedur erbet. »
- Er verh.* — « Pe on oeit d'hober ur bale, ur promen ar men doar
— En es kavet ur vam trunel e me len e vouitar.
— Em es kavet un drunelig e me len e vouitar,
— Me oeit a dunchet debi e segur e deurat. »
- Er drunel.* — « Te ha es kollet ha pried, me mes kollet me far ; ».
- Er verh.* — « Hag hi hum daulas da veruel tre er bod hag en doar. »

JOB EN DROUZ-VOR.

Konchen ha kentel

An ael, an dour, an tan a ree eur balead dre vro Breizl-Izel. Tri fotr terr a oant, mechans, prest hemde d'en em gemer doc'h kement den a kement tra en em gave war o hent. D'o heul e ie an enor ; heman, kalz furoc'h, a glaske tu da zel-chen liuimor prim e gonsorted pe da zistan d'o fennadou foll. O fewar e kemerent diduel o veachi, ar guellan ma c'hallent.

Eun devez kouskoude, n'ouzon perek, e oa red d'he kimmiadi an eil euz egile. Nec'h braz evit-he, rak pe guir e oant mignoned vad he n em blije

assamez. — Pep hani a gemeraz e du evit diblas, hep gout hag hen a welse mui ar re-all.

An ael neuze a chom e-zao hag a lar : N'hellomp ket, ma mignoned, nan, n'hellomp ket avad en em zispartio er mod-se. En em gleomp d'en em gaout eur wech benneg c'hoas, ha ni rey adarre tro Breiz, karzet-oc'h-karzet, gant plijadur egiz emoump breman oc'h echui he gober. — D'am zonz, ne vo ket sterd d'imp digouevout er memez lec'h, pa garimp. Evidoun-me, larit hardiz e vin tost pa welec'h del ar gué efichal, ne vern pegen neubet. Gozik doustu e san-tec'h ma hanal — fresk ha dous war ho tiouchod.

— Mar ne faot ken, eme an Dour, me rey d'oc'h ive eur merk ez evit ma c'haout : — Pa spermetec'h war eur blenen pe barz eun draonien eun torchodik broen glaz, dibradet-han, me vo dindan ho treid, prest da zével ha mall genin da gerzat.

— Ma, a laraz an tan d'e dro, c'hui ouio e vinn o tont war hoc'h arben, pa welec'h eur vogeden wen pe glaz o nijal skanw dre an aer : henez eo ma merk anat.

— An enor ne lare grik. Tenwal e benn, hen a zelle digonfort doc'h e aou gonsort. — Na c'hui, Enor, eme ar-re-men, ne larec'h ket d'imp pegiz ho havimp endro ? — Me, a respontaz an enor, en eur hijal e ziouskoa, me lar kenavo doc'h, ma mignoned paour, allaz ! evit bepred. — Eur wech oun bet dilezet, n'anr c'haver mui biken !

St-Aignan, Klegerek.

F. AR MAY

Peden eur Breizad

O Doue ! Krouer souveran,
Mestr d'an douar ha d'an den
Me lak ennoc'h ma fisians
Ma joa ha ma esperans ;
Gret ma vezo ho chervijer
Fidel ato d'he Zalver,
Gret ive vo fidel ato
D'ar Werc'hez, d'ar Sent, d'he Vro :
Roet d'ezan nerz ha kalon
Evit diferi ar Gwirion.
Pedi ran c'hoas ho Mab divin
Da zellet douz ha lirzin
Deuz ar Veleien, ar Varzed
Ha deuz an oll Vretoned.
O ma Doue ! Zilaouit mad
Peden vian eur Breizad,
Ha gret vezo fidel ato
D'he Vestr, d'an Iliz, d'he Vro.

AN ARCHANTEK,

Person en Liverdy, (Seine-et-Marne).

Damb arnehe !

D'em mignon ker Ale'houeder Treger.

I

Chileuet tud iaouank, tud koh ha bugale ;
Peizanted, duchentil, labourizion eüe

II

Ha hui gleüou ur son a neüeso saüet,
Aveit dihuen hur Bro hag hun lez beniget.

III

Arriü e en amzer, aveit omb Bretoned
De seül hun penneu hemb doujein den erbet.

IV

Pel erholh e omp bet goapeit ha disprizet :
Kommans e hramb chuijein dre forh bout goalgaset...

V

Aveit peün er goëd hun es chuillet eit te,
Er Galleued hiniü hun flastrein 'garche.

VI

Lavar kaer hun tadeu e glaskant de zismant ;
Er galleg brein 'n e leh, d'hun bugale ziskant.

VII

Brezel e hrant d'hun Fe, d'hun akustumanset,
Goude ou des sklapet 'dan ou zreid hun droëdeu.

VIII

'Ou guel e hramb bam-le kousi hur Bro karet,
E hober ou foënaj ar hun houst, Bretoned !

IX

Mes mal e vou dehe achiü get ou ardeu
Pe, kent pël, en hur Bro, ruou er flangenneu.

X

Er Brehoneg perpet e zalhemb de gönzal,
Tre ma padou hun tead, hun tead hag hun hanal ;

XI

Er galleg en hur Bro, bukin ne zourou ket
Ar er Brehoneg kaer zou ken koh èl er bed.

XII

Èl hun tud ar hur rauk. ni e ziskou eüe,
Despet d'er Galleued, breton d'hun bugale.

XIII

Er Fe zou grouiennet e dan hur haloneu ;
Ni virou hun droëdeu, hum akustumansou.

XIV

Mal vou d'er Galleued arsaü get ou brezel,
Rak ne ket hoah haudet rah Bleidi Breih-Izel...

XV

Damani er Galleu bukin n'anduremb ket :
Breihis, ne blegamb ket d'ur hoh pobl bastardeet :

XVI

Mar zalliant ar hun tro, damb arnehe a ben :
Ardran banden chetal, pe ni dorou hou pen !...

Er Goh-Ker, Kaudan.

ER BARH LABOUREUR.

MA GARREK

Er c'hoat me a zo o chom, en parroz Sant Servez
Hag en eur gear ar bravan he hano : Kerbernez.

Drek ma c'hearik 'barz ar c'hoat a 'n em gav eur garrek
Elec'h ec'h an aliez da rima brezonek.

Eur garrek koant ha kalced, debret gand an amzer
Goloet gand ar bân glaz, ouz he zroad ill tener...

Gourvezet ez eo eno abaoe meur a gantved
Eno da hun e chomo ac'hann da fin ar bed !

Warni war eun tam raden eur pennad 'raok ma c'hoan
Me ac'h a da ziskwiza goude ma devez poan.

War ma c'hoste astennet, ma dorn dindan ma fenn
Warni pell dimeuz an drouz, me a ve diberc'henn.

Warni en em ankouean aliez da sonjal
Da sonjal em buegez, ive da hunvreal...

Neuze ma spered tec'het digant e liammou
Ac'h a seder da redek traouien ha meneou...

Klevet e ran an ezen o vouskan en delliou
Ha 'n eur dremen war ma drem e skanva ma foaniou ;

An eonedigou ive arok mond da gousket
E klevan o kimiadi d'an de 'zo tremenet.

Neuze war zu an nenvou, ma daoulagad eüruz
A wel o lintri en oabl ar stered lugernuz !

Ha gant sklerijen al loar zeblant d'in c'hoaz gweled
Lutined-noz o tansal 'touez ar c'hoat droug-livet !

An oll dreo-ze unanet a luskell ma c'halon
Ha, tra ma sonjan enné, e gavan eun tam zôn.

Evelse war ma garrek bemnoz araok ma c'hoan
Me ac'h a da hunvreal, me ac'h a da vouskan...

Warni dalc'hmad 'n em blijan pell dimeuz an anken
Rag warni eo e zavan en peuc'h peb kanaouen.

Enpâd ma vevin eta me a ielo bemnoz
Da gana war ma garrek Bro goant ma Zadou koz !

Ha goudé ma vin maro, piou a oar ?... marteze
Vo klevet 'uz d'am garrek mouez ma Zelen bemde...

Klevet e vo o ouela, o ouela glac'haret,
Pe o kana hirvoudus : Maro eo ar Yeodet !

O neuze pa dremenfet, mignoned, 'n he c'hichen,
Lavaret eur bedennik vid ar barz na vo ken...

AR YEODET-BOCHER.

Klemvan Guenc'hlan

I

Evel ar gliz e strinka euz kalon bleun lirin
Pa vez o c'hoari gantho an ezennik vintin,
A strinke, o va zelen, kan fest euz da gerdin ;
Pa c'hoarielle gantho bizied mibin an Drouiz,
Notennoù gae tro var dro a strinke vel ar gliz !
Laouennoc'h vije klevet an avel o voudal,
An derven goz a groge he c'halon da dridal,
Mibien an Drouiz a bare ar vouse'hoarz var ho zal ;
Mez siouaz pell amzer zo da gerdin zo enoud
O teuler, elec'h kan fest, ar c'haon hag an hirvoud.

II

A-unan gant an Drouized pa gane an delen
Var gern huel ar menez hag e doun an draonien,
An heol mintin a darze flammoc'h e sklerijen ;
Evel pa vije enhi o prezeg mouez Doue
Sked ar guir da heul e c'han n'em zile en Ene ;
Var an amzeriou pella o skuba an noz du,
Sked e mouez a zisklerie d'an Drouiz euz a bep tu
Kouls hag an traou da zoned an traou guechall arru,
Mez an delen a sklerie noz ar c'hantvechou pell
Ne hell euz an deiz hirio d'an Drouiz dall rei ar guel.

III

Guechall pa groge enoud, an Drouiz en e heultrin
A zante euz an Nenvou tisken eun nerz divin
En em zile n'eur dridal hed-a-hed da gerdin !
Dreizoud ioa oll nerz Doue e galloud an Drouized,
Te o telennik dero, te a ioa stur ar Bed !
E zourn var an delen aour an Drouiz Veur a rene
Ar stered 'vel listri-tan a dreuz mor bras an Ne :
Ganti e sturie d'ar porz an Heol da fin an de ;
Hirio, tolet distolet euz dourn ar sturier paour,
Gant an treiziu var an od e ruill ar sturik aour !

IV

An toniou a zibune euz a dre va daouarn
A ioa liammou krenvoc'h eged dir nag houarn
Da liamma ar galon dre hent an diousskouarn
Euz ar c'hoajou pa glevet galv an delen zantel,
Ar Galtied a zirede n'eur gana euz a bell ;
A pa skarme mouez an Drouiz : Dale'h d'an enebourien,
Pegen ter var ho roudou 'lamme ar c'hadourien,
Entanet gant nerz ho kan, Drouized telenourien !
Va-unan gant va meinhir dindan skeud an Dero
Ne respount mui d'am zelen med ekleo ar Maro !

V

M'hen tou dre an oll muntrou gret var mein an Drouized,
Dre ar goad ruz a ruillaz abaoe dek kanved
Var grizien an derven vraz euz a bed-mil goazied,
Fennoz dindan va c'hountel heuz goad a zivero,
Enhan nerz ken diremed ma trec'he ar maro !
Ar gomz a loskin neuze a skoo var e hun
An Doue a stourm ouzomp evel eun tarz kurun !
Hag adarre, va zelen, e voudo da vouez kun ;

Mez ma dav c'hoaz da gerdin, va dent ho dispenno,
Hag en noz sioul ar maro hon daou ni ziskenno.

Lanniliz

MEL-OC'H-DIR.

LAOUIK

Kouignou tomm, kouignou tomm, tomm bero !
Setu petra a grie, adalek goulou deiz, dre ar ruiou,
Laouik, mevel bihan eur pastezer euz Brest.

C'houi, labourerien-donar, a c'houlennou, m'oar
vad, perag ez ea Laonik ken abred-se da werza kou-
gnou. Kement-se, eme c'houi, ne ve ket souezuz da
welet-e-kreiz ann deiz enn eur foar pe enn eur pardon
bennag. Mad, e kear e vez gwerzet kouignou bemdez,
hag ar muia diouz ar mintin, setu ama perag : War
ar meaz, kerkent ha ma vezer dihunet, ar c'hourlan-
chen a zo digar ha soubenn ar brignenn a dremen ken
eaz dre ar boull-galon eged eur banne dour. E kear
avad kalz a dud o deuz eur boull-gallon fall, ker fall,
ma ne c'hellont debri bara gand ho c'hafe : prena a
reont eta kouignou pere n'int ket kerpounner hag a zis-
kenn gwelloc'h. Evel-se, kerkent ha ma veze klevet
kriadennou Laouik, plac'hed ar vaure'hjien a zigore ho
fenestr enn eur her gervel : Digas ama eunn hanter
dousen pe eunn dousen a gouignou ; ha Laonik, d'ar red,
gand he banerad da bignat ann delesiou. Me l ma veze
mallgand lod klevet kriadennoù Laouik, lod all a iea e
kounnar out-han. Ne c'heller ket plijout d'ann holl-ha
meur a weach e veze kriet war-n-han : ne c'hellez ket
iouc'hall goustatoc'h, ginou lachefre ! n'oud mad nemed
da zhiuna ar vugale vihan e-kreiz ho c'houisk gwella.
Med Laouik a rea skouarn vouzar hag a iea atao euz
ann eil ru d'eben enn eur grial krenfoc'h c'hoaz : kou-
gnou tomm, kouignou tomm, tomm bero !

C'hoant hoc'h euz martreze da c'houzout dostu piou
oa Laouik. Laouik mab da Jakez enn doa, evel
meur a hini hall, dilezet ar meaz evit mont e kear ell
leac'h ma kave d'ezhan e vije eurusoc'h. Faziet oa bet,
rag ne c'hellaz kaout labour nemed gand ar vansoune-
rien, enl labour denn ma 'z euz unan, ha choaz ne
c'houteze nemed euz real bemdez ; oc'hpen, epad ar
goanv e kolle meur a zevez, rag pa vez glao pe skourn,
ar vansounerien ne c'hellont ket labourat. Laouik a oa
eta tennet euz ar skol evit mont da c'hounit eur gwen-
nek bennag, rak holl dud ann ti n'o defe ket bet bara
gand eiz real ann tad.

Micher Laouik keas n'oa ket euz ar re wella,
rag kaer en doa krial, deveziou a veze ne c'houteze ket
pempzek kwennek. O va Doue ! huanade aliez, pebez
buez eo hou-ma ! Va zad en deuz bet eur zonzjoun dis-
kiant o tont da Vrest ; ha neuze Laouik a zeue da zonzj
d'ezhan euz he barrez. Gwelet a rea an prajou braz
el leac'h ma 'z ea da zul, da c'houde ar gouspercu, da

gutwill kraon-kelvez ; ar ster sklear el leac'h ma kase d'ar pardaez he loened da zoura ; ha kerkent hano pep hini euz e loened a wech all a zeue war he vuzellou : Brijel, eul loen hag a zente ont-han war eur ger ; Min-du, ar vioc'h laer a lamme atao dreist ar c'hleuziou evit mont war eunn dachennad bennag a velchenn, har ar c'hi Tom a iea kerkent d'e diarbenn. Ia, e gwirionez, eürusoc'h e oa war ar meaz.

Ha goude ne vijenn nemed mevel enn eunn tiegez eme-z-bran, e ve gwelloc'h gan-en c'hoaz ar stad-se ; heza o werza kouignou e kear pe o tiwoal al loened war ar meaz a zo ato-beza mevel ; da vihana war ar meaz em bije muioc'h a frankiz ; e leac'h krial kouignou tomm e kanfenn eur zoun pe eur werz bennag, ar pez a zo kaeroc'h ha laouenoc'h ; ha neuze pegement e vijenn didrabas ! e leac'h ama va mestr n'euz nemed gwidre enn-han ; ne werzann biskoaz a-walc'h a gouignou pe re zivezad a tistroann euz va zro da rei ann dourn d'ar fournier. Ia, ia, kas a rankann ar goz zieher daonet-ma da zutal ha distrei a rinn war ar meaz ; med penaoz e lavarinn kement-ma d'am zad ? Ne gredann ket.

Koulskoude d'ar mare ma tremene ar zonzozonno-ma dre spered Laouik, Jakez he dad n'edo ket, diouz he du enn eul levenez vraz, rag epad ar vintinvez-ze ar glao ne elianaz da goueza ; eun hanter devez kollet evit han oa eta, ha Laouik, diouz ar pardaez, enn eur en em gaout er gear, en divije bet great mad o komz d'he dad euz he c'hoant, m'oar vad e vije bet selaouet. Med ne gredaz ket lavaret eur ger enn dro-ma adarre.

Epad ann noz avad ne reaz nemed huvreal. A-wechou e kave d'ezhan e nije dreist ar gwez huel, evel al laboused, hag e wele e-c'harz ar menez, e ribl ar ster, he lojennik, ker koant gand he mogeriou gwenn, e touez eur vodad gwez evleac'h ; al loened o peuri er prajou glaz ; ar gwiniz o veleni enn dachennou, hag a hed ann henchou striz ar goazed gand ho zokou ledan kelc'het gand eur voulouzen harr ; ar merc'hed gand ho c'hoefou gwenn kann ha gand ho birnidennou marellet kaer, o vont a strolladou d'ann oferenn bred. A-wechou all avad e wele eur bern kouignou hag a bigne huel, huel, ken huel ma 'z ea dreist tour iliz Sant-Loiz-Brest, hag e teue neuze da veza eun enkrez. Penaoz emezhan, e c'hellin-me dont a benn da werza kement a gouignou d'am mestr p' em euz ker braz poan o werza diou banerad hebken bemdeiz ? Heb en em fazia, ar bern kouignou-ze a vezo trenket holl araok m'em bezo o gwerzet.

Pa zavaz, mintin mad, e oa terval be benn, rag ar bern kouignou en doa gwelet enn he huvre a ioa atao dira-z-han. Eunn dra bennag a lavar d'in, eme Laouik, e c'hoarvezo eur gwall-eur gan-en hirio. Deomp evelato, ha gedomp. A-wechou Doue a zigas d'e-omp enkrez evid hon lakaat da zont enn-omp hon unan, ha da veza krenfoc'h da herzel goude-ze. Herzel a ioa ama, evit Laouik, ann nerz-kaloun da anzaio d'he dad ar c'hoant braz en doa da zistrei d'he barrez evit diwall al loened n'euz fors e pe leac'h.

Er vintinvez-ze Laouik, kaer en doa bet krial a bouez penn : « Kouignou tomm, kouignou tomm, tomm bero » ! n'en doa ket gwerzet eunn hanter banerad da unnek heur ; evel-se, pa zistroaz da di he vestr, he-ma a iez enn eur gounnar vraz, enn eur lavaret : « Tamm lezirek ma 'z oud, te zo chomet da c'hinaoua dirag imachou e stal eul levrer pe dirag marc'hodennou e ti eur barver. Gwelit ar mec'hiek-ma, d'he oad, ehom da zellet ouz marc'hodennou ; setu ama eul labous fresset avad ; piou en divije kredet kement-se ! Lez aze da baner ha kea poan da brena ugent lur sukr malet.

Laouik a jomaz mud hag a iez da brena sukr. Ann dimezel euz ar stal a boezaz ugent lur sukr malet enn eur zac'h paper tano, hen stardaz gand eunn neudenn, hag hen roaz da Laouik pehini a baeaz dostu. Med a boan m'en doa great peder gammed er ru ma kouezaz ar zac'h enn eur freuza, ha setu ar sukr ledet war ar vein.

Ar re a dremene dre ar ru a en em vodaz neuze enn dro d'ar sukr kouezet, enn eur c'hoarzin hag enn eur c'hoapaat ar paour keaz Laouik, ne c'houe penaoz en em gemeret, pa zeuaz ann dimezel euz ar stal, dre druez out-han, da rei d'ezhan ann dourn d'hen dastum enn eur zac'h all.

« Penaoz ec'h euz en em gemeret 'ta » ? eme ann dimezel. « Gwelet a rit, eme ar paotr keaz, eo chomet ann neudenn em dourn hag eo eat ar zac'h d'ann traon ». « Sapre ginaouek, eme ann dimezel, ne gemeret ket eur zac'h sukr malet, dastumet enn eur paper tano, a zibous ann neudenn ; sell mad : kemer ar zac'h dindan da gazel, da zourn kleiz a-zindan founs ar zac'h, ha da zourn deou war gorre ; brao eo d'id eo seac'h ar ru hirio, rag ma vije bet glao kement ha ma 'z euz bet deac'h, da zokr heb dale a vije bet louz holl hag hanter deuzet ; kea enn hent brema, hag eur weh all taol muioc'h a evez ».

« Nan, nan, eme Laouik, a-zougenn brema ar zac'h evel m'oa bet diskouezet d'ezhan gand ann dimezel, n'ounn ket great evid ar micher-ma, ha zad en deuz bet eur zonzozon diskiant o tont da Vrest ». Koulskoude, evel m'oa bet dastumet mad ar sukr, Laouik, a c'hellit kredi, ne ziskuilhaz ket ann dra d'he vestr, na d'ar fournier, rag goapaet e vije bet gand he-ma, ha gourdrouzet gand egile. Dinec'h e tebraz eta e vern, rag ar gwall-eur a zonje, d'ar mintin, a dlie en em gaout gand-han, n'oa ket braz. Sioaz ! ann amzer da zont n'eo ket d'e-omp, hag heb dale Laouik a anavezaz eo ar wirionez kement-se.

Da c'houde mern e oe lavaret d'ezhan kemeret eur baner evit mont da brena pemp dousenn viou. D'ar mare ma treuze ar ru Siam, he banerad viou war e benn, eunn digezegerez a ziskenne ar ru diouz eunn tu, epad ma pigne diouz ann tu all eur c'harr-tan. Laouik, gand aoun da Seza frigaset, a reaz kammjou harr, evit tizout kougn ru ar Ramp ; d'ann hevelep amzer ivez, eul foutren pez ki du a ziskenne ar ru-ze, d'ar red, hag a zeuaz d'en em daoler etre divesker Laouik. Kerkenl ar c'hi du, Laouik hag ar banerad viou da ruilh d'ann douar.

Va zud keiz, m'o pije bet gwelet an taol-ze, o pije m'oar vad gouelet pe c'hoarzet; marteze o pije gouelet ha c'hoarzet enn hevelep amzer; dre druez ouz Laouik o pije gouelet, m'o peuz eur galoun dener, med o welet ar c'hi du deuet da veza melen enn eunn taol kount, ha dillad gwenn Laouik deuet da veza ker melen all, n'o pije ket gellet, a gav d'in, en em viret da c'hoarzin ken nebeud. D'ann ampoent, eur serjant poliss a grogaz e Laouik a ioa o vont da dec'het gand e baner c'houllo, kement a vez en doa o chom eno: « Va faotr, eme ar sejant poliss, kailharet ec'h euz ar ru, ha me a zo o vont da gemeret da hano, ma ne zastumez ket dostu ar c'hlo-sennou vian-ze enn da baner ». Laouik a rankaz senti, ha dastum beteg ann diveza tamm kloenn vi, ha kement-se dirag oc'hpenn kant den diredet eno, hag a c'hoarze o welet pegen dillo e oa bet great ann alumenn viou-ze, heb tan hag heb billik

Laouik avad da c'houde, a ieaz ac'hano d'ann daoulamm, rah mall en doa d'en em guzet oc'h daoulagad an dremenidi a jome sebezet o welet mevel bihan eur pastezer gwisket e melen.

Enn eur welet Laouik er stad-se, he vestr a ieaz enn eur gounnar zu: « Mastin a baotr, eme-z-han, er mintin-ma n'ec'h euz gverzet kazi netra, ha da c'houde kreteiz e torrez pemp dousenn viou! ann dra-ma a zo re; ne c'hellann mui d'az talc'her ama, me ro d'id da eiz devez ».

— O! eme Laouik, eiz devez c'hoaz da jom ama! Nan, nan, dalc'hit ar priz euz ar viou, ma kirit, war ar pezh a lleet d'in, ha me lavar kenavezo de-hoc'h dostu ». Ar marc'had a oe great raktal.

Enn dro-ma avad, Laouik a gredaz anzañ he c'hoant d'he dad, pehini a asantaz. rag hen ivez a ioa skuiz gand he vicher. O veza ne c'hellaz Jakez kaout nemed eunn atant vihan, Laouik a ieaz da vevel enn eunn tiegez braz. Dont a reaz da veza ken desket war al labour-douar, ma timezaz d'ar benherez euz ann tiegez-se, rag hon-ma a zonzaz: « Gwelloc'h eo d'in dimezi gant Laouik, m'an euz bugale eunn deiz e c'houzounn ervad e vezint d'ho zro labourerien-douar, rag ho zad n'o lezo biken da vont e kear da ober micher ebed, ha dreist-holl, ar vicher a bastezer. »

Per PRONOST (Barz Treflez).

AN DRAMM KENTA

Pehini e-touez ar Varzed a ra brud hirio en Breiz a c'halle lavaret en deuz savet eur barzoneg kaeroch evid hema, gret koulskoude gant eur potr iaouank a c'hwetek vloaz?

Eun tam park a dri gorn leun a winniz pounner,
Lec'h ma c'houe da vintin an avelioug dister:
Setu aze douar mad eul labourer paour,
Douar hag a dal zur kalz gwelloc'h evi aour.

Ar c'horn moan deuz ar park zo plantet barz eur c'hoat
Da veure en miz eost, an evned 'n eur bagad
A glever er girzier oc'h ober kaniri,
Hag uz d'an toc'hed aour e nij ar gwennili.

Ele Doue, ive, glebiet o divesker
A ra en dro d'ar park, mez hini na weler;
O daouarnigou flour a zastum eun tokad:
« Arru eo darv an ed, ha poent e hen falc'had.

Ar blouzen wen a strak pa c'he savet an heol
Ar skrillet da gana, dont a ra tom 'n eun tol.
Ar c'hlizen zav d'an aer, ha ganti 'sav c'houez vad.
Arru eo darv an ed, ha poent e he falc'had ».

Ar meder dre ar c'hoat, eur falc'h lem war e skoa
'Zo arru er c'horn moan e lagad leun a joa
Da zellout ouz an ed, gant plijadur a van
'N e galon levez, levez douz 'vel glan.

Pell amzer e lagad a zell ouz ar gwinniz
Ruskellet doustatig, perlezennet gant gliz.
E skouarn a blij d'ezhi klevout ar greun melen
O tigeri ar pell ebarz en zoc'haden.

Mez petra 'grog ennan? Set-an da skuill daero!
En e galoun ar joa, eur joa dener mar zo,
En em ziskarg, a zav, a gas d'e benn ar gwad;
Sell eur c'hren war e iez, ha dour en e lagad.

'N em zantout 'ra peet euz e holl boaniou braz
Pa wel e barkad ed sulaouret, darv ha kraz.
Eur blijadur e d'an tremen e zorn kaled
'Mesk an toc'had melen, dre c'hras Doue savet.

« Larout c'hoaz, emean, na neus Doue e-bed!
« Oh, geo zur! M'hen tou d'ac'h! Mar meus eur parked ed
« Ec'h e bet roet d'in gant Doue ma c'hrouer:
« 'N eur park treut evelhen na zeu ket a ed kaer ».

Hag ar meder neuze, dlwisket e chupen,
Lemmet ervad e falc'h, ha laret e beden,
A sko an tol kentan: setu e-traou dustu
Plouzennou gwen o zroad, hag o bek kazi ru.

An dram kentan 'zo deut; an den a leusk e falc'h
'Vit ampoezan an Dramm ha vit tanva e walc'h
Ar greun a zo enni: Ed founnuz ha blaz vad!
Ouz ar c'harz ac'h aze hag ennan kalz a stad.

Mesk an toc'hed pounner oa dindan e gazel
O fennou daoubleget, bugale o vervel,
Eun nebeudig roz aer, bleun a bep sort, burli,
Lake 'nean laouen gant o liouiou glaz, ru.

Ar meder d'o zapout goustadig gant dudi.
« An douar, emean, a wall blij d'ei c'hoari! ...
Hadampoezet an dram... « Piou 'ta warlerc'h Doue
« Piou 'ta, me garje gout, 'neuz savet an ed-se?!

Barz an tammik park se, pebez trubuil noa bet,
Na neus ket c'hoas gwall bell, pa n'oa eno renket
Da zastum aliez meur a vodad piz rouz:
Netra ken 'ziwane e-barz eur park ken louz.

E dad koz da gentan, pa nije ket labour
Deue eno ive dindan an ere'h, an dour,
D'ober eun dastum vein, 'vit netat an douar
Ha trawalc'h noa zerret da veinan an hent kar.

— Aman, me ar meder, neus c'houezet ma zad koz
 « Ma zad me war e lerc'h, hen et d'ar baradoz,
 « Ac'h arouiaz aman, a hadaz patatez,
 « Ha d'e bark 'rôk mervel, laraz d'in toul evez!
 « E boaniou hag e wad 'er bla-man 'zo zavet
 « Da krouec'h gant ar blouzen, beteg greun an toc'hed,
 « Ha c'hwel aze perag e pounner ar gwinniz;
 « Me ive, ouz ar park, me am euz sellet piz.
 « Ar griou 'deuz kavet, e-barz kof an douar
 « C'houezadur ma zadou. Freuz hon foaniou dispar.
 « Neus c'houeet ar blousen ha zulaouret ar greun;
 « Ar gwinniz a zo stank hag an toc'hed 'zo leun.
 « Choaz e klevan penoz an dud a bolltik
 « 'Zo klask bouta o fri beteg em zam eostik
 « Petra deint da welet e-barz ma labourio.
 « N'eint mann en deuar-man, mann, memez o halo!
 « Ia larout a reont n'e ket d'in ar park man,
 « Mes park an neb a gar! N'e ket me da gentan
 « Meus hadet an eost man, diwoanet dre ma gwad!!
 « Heilloned!!! emean ». Hea 'darre da falc'had.

ROCHLANN

(Euz skol brezonek kolaj Gwengamp)

Theatr Pontekroaz

Potred an *Unvaniez Pobluz Pontekroaz* o deuz c'hoariet disul dirag eur fors a bobl, eun drajedi en tri arvest great evitho divar benn *hisor Breiz* gant Fanch Goyen: an drajedi a oa hanvet *Ian, abad Landevenek*.

Ar skrivagner a ziskuel en arvest kenta, ar Vretoned gwasked gant an Normaned ken a renkont kuitaat o Bro, blienet gant Benedik abad Landevenek.

En eil arvest unan euz menec'h urz Sant Guenolé, e hano Ian, deut abad goude maro egile a zo nec'het o welet e Vro dilezet gant e c'henvroiz hag a lak en e benn da doler e meaz a Vreiz an Normaned. Distroi a ra d'e vro hag eno, skoazellet gant daou bentiern euz koste Landevenek, pere n'o deuz ket fellet d'eo dilezel ar Arvorik hag a zo chomet en despet d'an Normaned, e teu a benn da zével eun arme. Vel mestr varni, a c'halv euz a Vro-Saoz Alan Mab Matuedor. Mez Ian e hunan a teu da veza paket gant eun Normaned ha kaset gant hini vel prizonier.

En trede arvest, ar gounid zo gand ar Vretoned. An Normaned zo bet trec'het dre holl en Breiz gant Even, kont Leon, Berenger kont Roazon, hag ispisial gant Alan, lez hanvet al Louarn. Ne jom mui d'eo nemet eur c'hamp e Plougastel. Alan gant skoazel Gwetenok, unan euz daou denjentil Landevenek, a stourm outho. Kouskoude Amalgod eun denjentil all, a zo deut a benn da zerc'hel Ian er c'hamp dindan surveillanz an hini en

deuz hen paket: Urz zo bet roet da heman laza ar manac'h kentoc'h evit hen lezel tre daoufarn e vignoned mar zigouez d'ar Vretoned bea trec'h. Evit beza lezel da vont ebarz kimp an Normaned, Amalgod en deuz renket ober van da veza sod. E keit e ma o prega gant Ian e klevet iouc'hadennoù ar Vretoned ha malloziou ar Normaned trec'het gantho. An Normaned a ziuall Ian, a zeu kounaret braz, hag a esa laza heman, mez Amalgod a bak peg en eur c'hleze hag a laz anezhan. Alan gant e soudarded a zigouez var an theatr. Joa braz a zo gantho o welet en iec'het an hini o deuz kredet e oa maro. Ian a drugareka Alan hag a lavar d'ean Breiz a zalc'ho sonj euz e hano evit beza deut a benn da groui a nevez ar Vro. Mez Alan a respont d'ean n'e bet med ar vreae'h a labour, lec'h hen. Ian, zo bet ar penn.

Varlec'h zo bet c'hoariet eur pez fentus gallek en 2 arvest *Le Docteur Chiendent* gant Varin, hag en deuz laket an dud da c'hoarzin euz adalek ar penn kenta beteg ar mare diveza.

Gourc'hemennoù ez euz d'ober d'an aktourien ken koulz euz an drajedi vel deuz ar c'hoariaden fentus, evit an doare gwir o deuz c'hoariet aneo.

Jos ALBARET.

GWERZ

Evit trugarekat Kevredigez Broadus Breiz deuz ar vedalen arm he deuz roet d'in en Gourin, en mis Gwengolo 1904.

Eun dra gaer meurbed war ar bed,
 Eo karante tre mignoned,
 Rei ra skoasel 'n eil d'egile,
 Gant kalz a joa, dre garante.

Dre garante o'houi Jaffrennou,
 Ho peus bet komzet evidon,
 Bars ar genskrivadek breton,
 Dirak an oll gant nerz kalon.

Ha mestrou ar genskrivadek,
 Dre garante deuz d'in roet,
 Medalen arm d'am enori,
 Hag ober eur barz diouin.

Aotrou mad An Estourbeillon,
 Trugare d'ac'h a greiz kalon,
 Trugare Aotrou Jaffrennou,
 Da vezan komzet evidon.

Trugare da gement hini,
 An neuz bet lavaret rei d'in,
 Medalen arm bars en Gourin,
 Ha da rei eun hano Barz 'din.

Na n'eo ket dre lorc'h a teuan,
 Da ganen d'ac'h aman breman,
 Ma vo r gloar da Zoue roet,
 Rag me zo den dister meurbed.
 Kenavo da vlâ a laran,
 Dac'h ma mignoned ar gwellan,
 Benn neuze ni momp adarre
 Skrivet eun dra bennag neve.
 Bevet en Breiz ar fe bepred,
 Ha karante ar Brezonek,
 Meulomp Doue var an douar,
 Ma vemp asamblez c'hoaz er Gloar.
 Evelse bezet gret.

JULUAN GODEST.

Leorlennadur

CHANSONS DES GARS D'ARVOR, gant IWAN AR STANG (Ar Barz du) E ti an oberour, 64, rue de la Hautière, Naoned.

N'eo ket lâret ec'h anavesfe holl lennerien ar paperma hano ar barz iaouank a rer Iwan Ar Stang anezan Koulskoude. Iwan Ar Stang a zo ginidik deuz ar Faouet (Morbihan). Mond a reaz iaouank da labourat da Naoned, hag eno, dre ma kreskaz, e teuz da garout mui-ouz-mui e zouar koz hag e genvroiz.

En e zihan labour, e komansaz rimel soniou gallek divar benn Breiz, hag ar soniou ma a zeuz buan da veza remerket gant Naonediz. Brema na ve ken kaniri a-bed en Naoned na na ve klevet enno kanaoenou Ar Stang.

Ar Stang, evitan da rimel dreistholl en iez gallek a oar mad ar brezonek. Karout a ra ive hon iez, ha meur a wech en deus hen diskuezet en eur zond da Oueliou *Kevedigez broadus Breiz*. Digemeret eo bet er *Gorsedd* gant al lezhano "Barz du".

Ar Stang an neuz nevez moulet eun daou-ugent benag deuz e ganaouennoù brava var baperennoù distag. Goulenn anezo. An ton a zo merket varnezo ive. En o mesk, e welan LA VOIX DES FLOTS; LE CHERCHEUR DE PAIN; AU PARDON; A L'ABORDAGE etc. Holl int deuz ar c'houeka ha kanet gantan, int kaeroc'h c'hoaz.

DRE AN DELEN HAG AR C'HORN-BOUD, gant ERWAN BERTHOU (Alc'houeder Treger). Priz: 8 real. E ti Prud'homme, Sant-Briek, pe An Dault, Pariz.

Sethu ama al levr kaer a oa bet komzet anezan, hag a zo deut benn ar fin da beteg, ennomp. Hema en gwirione a zo eul levr a wir varzoniez, ha birvi a ra ennan ar spered breizad ar glanna, hag an ijin barzonijs an uhella. Neubeud a c'hoarz hag a farserez a zo el levr kaer-ma, neubeud a zaélou aner ive; ama na glevomp ket mouez hirvoudus ar biniou na diston an toniou danz. An delen a zon! An delen goz, dir he c'herden ha dero he stern, an delen goz keltiek a vije gwech all etre daouarn peb barz, hag a zo bet adkemeret gant Berthou. Kana mad a ra ganti en brezonek, (koulz hag e rea araok en gallek), rag Berthou an neuz savet meur a levr gallek ive. Var an delen e kan amzer dre-

menet hon gann didrec'hus, kaerder hon ine broadus hep he far, divarventez hon iez enorus.

Hag echu d'ezan var an delen, sethu e krog goude er c'horn-boud, er c'horn a vrezel!

Hissal a ra ar Vretoned var enebourien kantvedek hon gouenn — Gallaoued ha saozon, — prezegi a ra an unvaniez etre breudeur evit beza krenvoc'h pa zigouezo an heur evito da gerzet d'an argad.

Nag a werziou dispar a zo el levr-se, hag a vefe lennet gant levnevez gant peb Breizad gwad ru! Kentent sujet an neuz perz en hon bro a zo kizellet d'ezan eur stern dudius a rimadelloù brezonek c'houek: lennit kentoc'h: *Distro ar Barz*.

Ganet en douar lann a roz

War ribl mor gouez an hanter-noz

Pa oan ebarz ma c'hentan oad

Em gwazied oa ru ar gwad.

An *dihun Keltiek* a zo ive eur pezh-labour deuz ar c'haerra hag an neuz goneet en Gourin ar priz a 500 lur roet gant an Itron Mosher.

Nag a vennoziou uhel a zo ive en *Hini Goz*, an *Dou-sik Koant*, *Ar Barz*, hag ugent all.

Ia, kresket eo lizeradur Breiz deuz eul leor deuz ar c'henta.

L'ERREUR DE FLORENCE, gant CHARLEZ AR GOFFIK, Librairie Hatier, Paris: 3 fr. 50.

C'hoaz em heuz da gomz d'eoc'h deuz eun ober nevez deuz hon c'henvreur brudet Charlez Ar Goffik. Eur romant eo hag a c'hell beza lakeat etre daouarn an holl. *L'Erreur de Florence* a dremenn ar zujet anezan en Breiz-Izel, en Huelgoat: skrivet eo al levr gant kalz a ijin, hag ar steun deuz ar gontaden a stag al lenner ganthi dioustu ma 'z eo krog er penn kenta. Hon gwella gourc'hemennou d'an Ao. Ar Goffik pehini a oar lakaat ar peb sklerra deuz e dalant en zervich e vro Breiz, n'ez forz petra e skriv, er gelaouennoù, hag en e levriou dreist-holl.

ETUDE SUR LA PHRÉNOLOGIE, gant R. M. JOUAN.

Eul levrik gwiziek diwar benn ment ha ledander spered an den, nevez embannet gant an An Ao. Jouan, deuz Kenvreuriezh ar Spered Santel. An Ao. Jouan a zo bet kelenner filozofi en Paris, ha profesor skiantchou, ha gwelloc'h evid den all a-bed, e oa gwest da skriva diwar benn ar « phrénologie » traou uhel hag eaz da lenn war eun dro, hag a lakeo istima mui ouz mui gant e genvroiz breton oberour « Histor parrez Karnoët » ha « De l'Habitabilité des Mondes. »

JOZON EL LAGOUTER, gant JOB ER GLEAN. Gwened, e ti La-folye: 4 real.

Hon c'henvreur-an Ao. Ar Bayon, ar barz Job Er Glean, na goll ket e amzer, hag e stud'ou ne viron ket outan da labourat war e stern evid sevel ha sevel bepred peziou-c'hoari da greski an Teat'r Breton. Sonj hoc'h euz pegen braz levnevez e oa d'an holl klevet c'hoari *En Eutru Keriolet* en Alre gant paotred Gwened, hag en Plewigner, gant paotred Plewigner. *Job el lagouter*, skrivet en eur brezonek c'houek (lângach Gwened) en devo ken mad digemer hag *En Eutru Keriolet*. Eur gomed deuz ar brava eo, hag ouspenn-ze, eur gentel vad evid al lonkerien hag al lagouterien. Ar gallek a zo lakeat e-kenver d'ar brezonek: mez ne oa ket ezom a gement-se; icz pur ha freaz Job er Glean a zo lennet eaz koulz gant Kerneviz-Leoniz-Tregeriz evel gant ar Gwenedourien o-hunan.

AR BOBL

GAZETEN SIZUNIEK HANTER VREZONEK HA HANTER C'HALLEK

Ar gwella great, dioc'h asant an holl, deuz journaliou sizuniek Breiz-Izel.
An hini a zo kensakret hepken da Vreiz ha d'ar Vretoned.

EUR SKOED AR BLOAZ

Evid koumananterien *Ar Vro* : *C'houezek real d'ar re all*. Skriva d'hon
Moullerez a Geraez.


Taolit pled penoz

Ar Gazeten eo ar gwella benvek evid skigna an ideiou. Eur gazeten a 'n
em gav e peb lec'h, beteg er gearik disterra.

Sikourit eta ar journaliou brezonek, pa zo ken-neubeud outo. Klaskit en ho
parrez, pegen bihan bennag e vez, eun den da werza " AR BOBL " dre numero.

Oc'h ober ze, e refet an dra talvoudusa a c'helfec'h ober evid ho pro, rag ar
re a lenno ar skridou moulet er BOBL en em gavo buan da veza a du ga-
neomp.

Oc'h ober ze, c'houi a c'hallo lavaret ive ho pezo roet eun taol skoazel da
adnevezi ar sperejou breizad, ha da adober gant *Breiz eur Vro unanet, eur Vro
nerzus, eur Vro disket*, var behini na drec'ho biken goude ar falz-kredennoù nag
ar re a zoug anezo beteg ennomp.



EMBANNOU

Stal-Leoriou
Ar Gwaziou
MONTROULEZ, 1, Leur-Gear Emil-Souvestr, MONTROULEZ
Niver braz a Leoriou Ofern evit Prizioù katekis
Goulou Koar a bep seurt evit an Ilizou

Sebastian Ar GAK
Lez-Vren, dre Gemeneven (Pennarbed)
Leazdi Vraz : Amann fenn
Savadurez-skouer a ouenn saout Breiz
JISTR A GENTA MERK.

Gwin koz a beb bro
Kaliteou braz
Gwinou - ardant ha Likeuriou
F.-M. PERSON, Montroulez

En ti PENNVEN, kizeller
Ha garaner koat
En PONTIVY (Morbihan)
E kaver espisial
Meurb breton da brenan
Hag annez all a beb seurt mod

Stal-Leoriou. --- Paperou livet
MAUVIEL
12, Ru Brest, MONTROULEZ
a werz ar gelaouennoù brezounek, hag a beb
seurt moulladurezoù

Grand Hôtel d'Europe
A. BONNAUD, Perc'henn
MONTROULEZ
A zigemer "Ar Vro"

MENGLEUZIQU MEIN-DO
Er Mill-ar-Bik, Parrez Paule
KANTON MAËL - KERAËZ
Bep seurt Mein-Glaz, henvel ouz re Angers
Per NIVET, entrepreneur, PAULE

Erwan Guillou
MARCHADOUR KOAT ha PLENCH
(Koat ar Vro ha koat Hanter-Noz)
KONVERSER TEMZ
Sant-Nikolas - ar Pellem (K.-an-N.)

Kezek - Houarn --- Gweturioù - dre - dan
J. RIOU
KERAËZ -- Ru an Augustined -- KERAËZ
A werz kezek-houarn deuz ar gwella merkou
hag a bren ar re goz
a fich hag a engal anezo marc'had mad
EUN TI ALL AN EUZ EN GUÉMÈNE (MORBIHAN)

GWINOÙ BOURDEL
René MIDY, ha K^{oz}
75, Cours du Médoc, BOURDEL
Ha 3, rue Duhamel, ROAZON



EMBANNOU

Levr di Brezonek
MORIS AN DAULT

6, RUE DU VAL-DE-GRACE, PARIS, v^e
Stal leoriou koz ha nevez diwar benn Breiz
An Taolennou a ve kaset evit mann

Ar roue deuz al louzeier eo an
ULMINUCINE MOREUL
Louzou evit spura ar gwad fall, hag ober d'an dud
krenvaat. — Al litrad : 2 skoed. — An hanter-litrad :
1/4 real.
En ti **MOREUL**, apotiker, **LANNDERNE**

Erwan HERNOT
Kizeller Kalvariou ha Mein-Bez
Ru Lanndreger, **LANNHUON**.
BET MEDALLENET SEIZ GWECH WARNUGENT

HOTEL SIMON
KALLAK, Arr^e Gwengamp, KALLAK
Prejou. — Kambchou
— Marchosiou. — Gweturioù —

I A N E V E N N O U
Marc'hadour-danvez en SKAER
Evit kaout danvez, ha lakaat ober gwiskamanchou giz
Skaer, stum nevez ha stum goz, en em erbedi ouz an
Ao. **EVENNOU**.

Ar gwella kelaouengalc'h gallek eo ar
REVUE DE BRETAGNE
MIZIEK
Koumanant : 4 skoed ar bloaz
EN EM ERBEDI OUZ AN AO. DE LAIGUE, REDON (ILE-ET-VIL.)

Frédéric PINCEMIN
3, 5, 12, Ru-al-Lian, **SANT-BRIEK**
Mezer ; Lianach ; Danvez dillad
Kezek-houarn **CLEMENT, HUBERT, ANDRU**, etc.
Kezek-houarn dre dan **WERNER, GRIFFON**, etc.

MIKEL KEINEK, toker
11, Ru Kereon, **KEMPER**
Tokeier Bretoned ha Beleien. — Mezer - Dillajou
breton. — Sier-Beaj. — Malijennou, etc.

Gwin Champagne « **LA MOUETTE** »
Cwir gwin a Vro Champagne
Perc'henn : Ch. Vogèle, Reims, Champagne. — En gwerz
e ti holl vare'hadourien gwin Breiz-Izel. — Kannader :
G. DELAFARGUE, LANVOLLON.

Gwiskamanchou diwar vuzul
DA VOUC'HIZ HA DA OFISER
R. Salaün
Kemener
BREST — 37, Streat ar Ramp — BREST

J O B F R A N C È S
Marc'hadour-Gwin
LESNEVEN (BRO-LEON)

FANCH MERRIEN
EN **SANT-NICOLAS-AR-PELLEM**
Liver Ilizou
Alaouer ha Sternier Poltrejou

Grand Café de la **TERRASSE**
PICART, Perc'henn
MONTROULEZ
A zigemer « **AR VRO** »

J. AR BRETON
27, Ru Pariz, **MONTROULEZ**
GWIN ; ESPISIRI ; PRODUOU MARC'HAD-MAD EVID
AL LABOUR-DOUAR HAG AN ANEVALED

Le Gérant : **Etienne JACQ.**

Les Imprimeurs :
Benjamin Joffe